

16.

Pedi ra Doue ar Baradoz
Da rei d'ho chapel he vennoz,
Ha c'houi hor Mamm, hor Rouanez
Da chomm enn-hi gan-e-omp bembdez.
Itroun, etc.

17.

Evel hon Eskop ni ho ped,
Ni holl kerent ha mignouned,
Ni zo ama deut diwar-dro
Gant kroaz ha banielou hirio.
Itroun, etc.

18.

Daoulinet e chapel Trezian,
Mamm, ni ho ped braz ha bihan,
Oh!... henniget Plouarzelis,
Ho deuz savet d'e-hoc'h eun Idis.
Itroun, etc.

19.

Lavarit da Jezuz, Mari,
Ez eo mall hon disc'hiac'hari,
Mall kaout truez ouz ar dud keiz,
Harpa ho bro, harpa ho feiz.
Itroun Varia, etc.

FIN.

IMPRIMATUR.

Corisopiti die XXVI^a mens. Aprilis an. 1877.

J. JÉGOU, vic


Imp. — Imp. J. B. Lebourier aîné

8N1-3-018

KANTIK

ITROUN VARIA TREZIAN

E PLOUARZEL



Var don : Ni ho salud, Stereden vor...

DISKAN :

Itroun Varia Trezian,
Deut d'hor c'hilevet braz ha bihan,
Ama, goude pevar c'hant vloaz,
Vel hon tud koz, ni ho ped c'hoaz.

1.

O veza ma'z euz amzer fall,
Ma'z euz koummoull du ha tenval
Oc'h horjellat dreist ar broiou,
Sellomp, Breiziz, doun en Neouou.
Itroun Varia Trezian.

2.

Ac'hano eo d'an dud a feiz,
Dreist ar c'hoummoull hag heol an deiz,
E teu an nerz a laz ar boan,
Digant Jezuz, digant he Vamm.
Itroun, etc.

3.

Kaloun Jezuz a zo mantret
O welfel pec'hejou ar bed,
Ha dira-z-han, plegel he fann,
Mari lenv war ar bec'herien.
Itroun, etc.

4.
Erbedi ra evit hor bro,
Var he daoulin, elez eun dro,
O kas vidomp da Zoue, hor Tad,
Daelou, pedennou ar re vad.

Itroun, etc.

5.
Daelou, pedennou a zo red
Evit gwalc'hi neat hor pec'het
Savet, siouaz ! vel eur valken,
Da c'holei ar bed a anken.

Itroun, etc.

6.
Evel ar Werc'hez venniget,
Dra-z-hi ama daoulinet,
Pedomp, gouelomp d'hor pec'hejou,
Ha lavaromp dre hon daelou.

Itroun, etc.

7.
Mari, Mamm da Zalver ar bed,
Evit hor pro pedit bepred,
Ha grit ma ramp gwir binijen
Da drei diwar-n-omp pep gwalen.

Itroun, etc.

8.
Selaouit, Gwerc'hez, Mamm dinamm,
Klemmou hor bugale vihan,
Gwenn ho ene, glan ho buez,
Out-ho, Mari, bezit truez !

Itroun, etc.

9.
Evel e Lourd, n'euz ket gwall-bell,
Ama, e Trezian-Plouarzel,
C'houi ho peuz diskonezet, Gwerc'hez,
Peger braz eo ho madelez.

Itroun, etc.

10.
Eur paotr ha ne c'helle bale,
Goude pedi a zav pare
En ho chapel, Gwerc'hez Vari,
E kavaz nerz d'he izili.

Itroun, etc.

11.
Ama gwechall kalz a c'hrasou
Zo bet gan-e-oc'h roet d'hon tadou :
Frealz ha sikour e pep glac'har,
Feiz d'ho ene, gliz d'ho douar.

Itroun, etc.

12.
Dre-ze, Gwerc'hez, eo nevezet
Gan-e-omp ho chapel venniget,
Evit ma chommoc'h enn hor c'hreiz
D'hon delc'her ato stard er feiz.

Itroun, etc.

13.
Enn amzer 'zo, mui get biskoaz
Hor heuz ezomm a c'hrasou braz,
Evit hezel ouz droug ar bed
A-eneb hon Doue, kounnaret.

Itroun, etc.

14.
Enep diroll ar pec'hejou,
Ni a unan hor pedennou :
Ni a fell d'e-omp beza bepred
Kristenien vad, gwir Vretouned.

Itroun, etc.

15.
'Kever an deiz ma'z eaz Jezuz
Diwar ar bed d'he vro etruz,
Ama eskop Kemper ha Leon
A zao he zivreach, he galon.

Itroun, etc.